

# BREZEL AN ITALI

1859

Neb a bed Gwerc'hes Remengol,  
Biviken n'on dai da goll,



Da hep he fed gant feiz  
Ho-ro-grason eleiz !

**Ann ITRON VARIA REMENGOL, Mam ar Vretonnet.**  
kurunet gand hon Tad Santel ar Pab Pii Nao, an  
30 a vis Mae 1859.

Var ton : *Santez Marie, Mam Doue, etc.*

- « Guerc'hers zakr a Remengol, guir Vam ar Vretonnet,
- « Plijet tomman va c'halon, digeri va speret.
- « Evit m'a roin d'am breudeur demeus a Vreiz-Izel
- « Kelou deus ann Itali, lec'h ma man ar brezel.
- « C'houi a zo, en peb amzer, advocadez ar Franz,
- « P'hini deus laket en-hoc'h he brassa esperanz,
- « Pe deus tennet he c'hleze, ha redet d'ann emgann
- « Vit kass deus ann Itali ar bobl Autrichiann.
- « Dr'ennoc'h, Patronez santel, hor zoudardet hardi
- « A zo bet trec'h d'ar maro, en brezel ar Russi ;
- « Digasset zo bet dec'h, da ilis Remengol,
- « Eur baniel kaer kemeret en kaer Sebastopol.
- « Cetu hint éd adarre d'en eum gann en tu mad,
- « O ped truez eus dañlou ho c'hoar, ho mam, ho zad,
- « Pere a c'houl-n ouzoc'h m'ellint pokat d'he c'hoas,
- « Ha dont gant-he d'ho kuelel, devez ho pardon braz.

Breziz ker, kent ma tenin da gomz eus ar victor

A zo, kamat ha kamat, oc'h heuil tud ann Arvor,

E rankan dec'h lavaret perak ar Francichen

Zo ed da gemeret peurs er brezel zo o ren.

Brema a zeuz eunnek vloaz, tud foll, pennou re domm  
A c'houezaz t'ân ar revolt er gêr demeus a Rom  
Evit diskar euz he dron Tad an oll gristenien,  
Hag ellout hervez ho c'hoant, lakat douj ho lezen.

An tad santel a dec'has dirag an dizurc'hon,  
Eb lakat he zoudardet da implij ho armou :  
Mes gouarnamant ar Frans a gassas dek mil den  
Da zikour renta dious-tu d'ar pab he gurunen.

Impalaër an Autrich pa velas kement-ze  
Da vikel bras Jezuz-Christ a gas-as eun arme,  
Var digare hen dioual euz ar vanden impi,  
Mes o sonjal ma vije mestr var an Itali.

Hag holl rouantelezion ar vro italian,  
Ouspen ma zeuz kalz ané a zo c'hoas goal vihan,  
Dreze, aben uguent vloas, an Autrich a elle  
Ho c'hemer da amezeg an eil goud 'eguille.

De a de ec'h avanse varni 'vel eul leon,  
Ha gant-han al læronsi, ar vuntr, an drabison,  
Goasset, groagez ha merc het, ho daouarn d'he staget,  
A doliou bas, en Milan a zo bet holl lazet.

Puissanzou bras an Europ a skoisas o velet  
Eur vro-ken kaër en drubuil, eb kaout repos ebet ;  
Kinnig 'reont d'an Autr ch dont d'en em assambli  
Evit goud penos lakat ann urz en Itali.

Impalaër an Autrich, fero gant he bouar,  
Dallet dre ar c'hoant dastum, a ras skouarn bouzar ;  
Eun arme vias a zavaz hag a lakas da vont  
Var douarou hor mignon, Roue ar Piemont.

Ar Piemont en eum gav en nord an Itali,  
Menez Alpez en trezomp a ra an disparti ;  
Poen a oa kas soudardet beteg ar frontieren  
Pe 'vije deut an Autrich da zebi hor zouben.

Gant hast ar gouarnamant a deuas da c'hervel  
Tud kalonek an Arvor, soudardet Breiz-Izel ;  
Da vouez hon impalaër ouspen daouzeg mil den  
A zavas, prest da vale, evel unan ebken.

Mes, arog kuitad ho bro ezint n'em glevet holl  
Evit dont da guimiadi euz Guerc'hez Remengol,  
Ar guentan, goude Doue, e gloar ar baradoz,  
Patronez muia karet, ha mam hon tadou koz.

Cetu hint deut da ilis guir *Vam an oll Remed*,  
Templ gant ar Roue Gralon ha Guenole savet,  
Ti santel en pehini Rounez an envou  
A ra vit he bugale ar brassa burzudou.

Ragtal, e treid an oter, e kuezont d'an daoulin  
'Vit pedi a greiz kalon stereden ar mintin

Da luguernin noz ha deiz var ben an dud e c'har,  
Ha d'ho c'hencha, deus an env, var vór ha var zouar.

• Guerc'hez Vari, emeze, princes vras an zele,  
• Ho sérvicherien kenta, Gralon ha Guenole,  
• O deus gret dec'h an templ-ma, k-n kaër ha ken huel,  
• Vit selaou hor pedennou ha difen Breiz-Izel.

• Cetu ni holl adarre o vont er méz hor bro,  
• Ni a lavar dec'h, Guerc'hes vad, ken a vo an distro ;  
• Mar c'homp lakit da drec'hi an Autrichi net,  
• E tigasfomp d'oc'h ilis eur baniel d'he tapet... »

Sevel a reont neuze, gant ho guialen ven,  
Da vont ini hag ini da bokat d'ar skeuden ; — (an imag)  
P'o devez ive poket da relegou saent Breiz  
Ereont, gant eur feiz vraz, teir guec'h tro an ilis.

Goude beza n'eum vouestlet a gori hag a ene  
D'ho fatronez gallouduz, pep hini aneze  
En deuz laket binniga, evit beza douzuet  
Eur vedalen burzuduz eus *Mam an oll Remed.*

Arog mont deus an ilis hint chomet sebezet  
Dirag eur baniel nevez gant aour ha perlès gret,  
Ha digas et deus Paris, abeurs Napoleon,  
Pini zo en em laket dindan gouard hon Itron.

Kuitat reont gant fianz en Mam an oll sikour,  
Mes arog koll ar guelec demeus a veg he zour,  
E kouezont var ho daoulin, vit ar vech diveza,  
Hag e kendalc'hont laouen ho hent en eur gana.

Ahen teir zizun goude e oant dija erru  
Er vro elec'h ma klie bea an emgan ru ;  
Evel en eur zer-lagad, ker prim hag al luc'het  
Hiat en em gavet dirag an Autrichianet.

D'an nao demeus a vis mae, Napoleon trede,  
A zo ed d'en eum lakat er pen deus he arme,  
En eur fiout he bried hag he vab, c'hoas bihan,  
En nerz hag en karante tud leal ar vro-man.

D'ar c'houezek ar memeus mis, kant adversour barvek,  
Evit diskuez peguement ezint tud kalonek,  
A zo deut dreist eur voguer en noz ha kuezet stard,  
Var eiz zoudard euz a Frans, a oa oc'h ober gard.

Bet o devez ar goal chans d'ober eun dro c'hollo ;  
Mes d'an uguent, en eul lec'h hanvet *Montebello*,  
O deus kredet n'eum digoll d'euz ho zol diagent,  
En eur gass var hon arme pemp mil den varn'ugent !

Ar zeitekvet bataillon chasseourien var droad  
Gant eur pevar regiment, leun a zoudardet mad,  
Gant ar general Forey, pemzek mil den ebken  
A oa karguet da zerc'hel penn d'an adversourien.

Mes bugale an Arvor, an dud-ze ker kalet  
Ha ker leuniet a fizianz er Verc'hez binniguet  
Deus ho bruchet, o tridal, a den ho medalen ;  
Pokat reout c'honk dezi, ha kerkent ... *tor he benn!!!*

Var kement zo diraze e saillont 'vel tigrêt,  
Pep tol digante a zrail an adversour spontet  
Ha red dezan n'eum denno goude eur stourmid ber  
Gant daou vit den mac'hagnet Ni daou c'hant prisonier.

Deg devez just, goude-ze, en tachen *Palestro*  
Gant an drede regimant a zouavet d'ho zro,  
A doliou baionett-z an Autrichianet  
A zo darn ane lac'hel, ha darn all zo beuzet.

C'hoec'h kant prisonier zo gret var an adversourien,  
Eb implija ar vindral hag eb loskeul eun ten ;  
Kanolliou an adversour zo ive kemeret ;  
Ra vo bepred an drede a zouavet *brudet !....*

D'ar bevar a vis even, var dachen *Magenta*  
E ze bet ar stok spontuz hag an emgaon goassa ;  
C'hoec'h ugent mil adversour oa n em gavet eno  
Evit klask trec'hi eur vec'h soudardet kre hor bro.

Tud kolonek an Arvor, kent evit skei ho zol,  
A stard deus ho muzellou medalen Remengoll ;  
Ho feden gant ar Werc'hez a zo bet selaouet :  
*Ugent mil Autrichian a zo gante lazet!!!...*

Tri ganol a daou vaniel gant seiz mil prisonier  
A zo deut ive gante en eur memez amzer ;  
Tud kalonek Breiz-Izel n'hint ket vit mont da goll  
Eur vec'h n'hint en em voestlet da Verc'hes Remengoll.

Eur breton, Ian-Mari Menez, a Plourin-Montroulez,  
Kasset en eun hospital da barea he vlez  
Goude var park an emgaon beza gred eun tol kaer  
En deus recevet ar groas a zorn an Impalaer.

D'ar c'hoec'h euz a vis even er ger gaer a Vilan  
Skuiset gant goalen ouarn potret Autrichian  
A zo en em revoltet, hag an adversourien  
O deus zavet skauv ho zroad dre n'ellent erzel ken.

Kanolliou a zo chomet var lerc'h an adversour  
Kouls a daouzek mil fusuil ha koufrou leun a aour ;  
A brizonnerien ive e zeus eun niver bras ;  
Ema a zo eun devez 'vel neus ket gulet c'hoas.

D'an eiz deuz a vis even, gant hon Impalaer  
Roue bro ar Piemont zo antreet en kaer  
Deus a bini an oll dud o deveus recevet  
Gant eur triomp ar c'haera princet ha zoudardet.

'Vit trugarekat Doue ha Gwerc'hes Remengol  
Da vea gred d'an Autrich tec'hel dirag an holl,

E katedral kær Milan, dirag ar bopl stouet,  
Eun *Te Deum* ar c'haera zo bet neuze kanet.

Da vouel Sant Ian-Badezour, kerkent a peder heur,  
Var bord ster ar *Mincio*, e zeus bed, va bredeur,  
Eun emgann ar spontussa, eul lac'h-res euzus  
Etre an enebourien hag hon tud ken nezus.

Ouspen kant anter kant mil soudard Autrichian  
Dispaket var hed pemp leo en eur blenen ledan  
A sonjas dre finesse diskar hon zoudardet ;  
Dre c'hraz Doue int bet c'hoas er veach ma diskaret.

An emgan 'p'd daouzed heur a voa tòm hag ingal,  
Eb beza trec'h en tu ma, nag ive en tu all ;  
An diou arme kreiz an tan, korf a korf a voa krog,  
Eb n'elle den mont a dre, na mont var an arog.

Eur bæleg koz euz a Vreiz, dispaket he vleo guen,  
Eunem strinkas dan daouliu neuze 'kreiz ar boutren ;  
Evel goechal Moïses, e zavas he ziou vrec'h  
Evit goulen d'hon arme nerz ha zikour an ech.

Kerkent soudardet hor bro a velas eur skeuden  
Eus ho fatronez zantel asect voar eur goabren,  
Neuze, laouen, d'an daoulin ezint n'emp strinket oll,  
En eur grial : *Meuleudi da Ver'ches Remengol!!!*

D'ho medalen e pokont... ha dao neuze dispar...  
Tregont mil Autrichian a gouezas d'an douar...  
Evit ar bevare guez'h o deus gouet pen da ben  
Pegen ferrubl e potr Breiz pa lavar : *lor-e-beun!!!*

Eun arme ar spontussa, kurun, avel foll dour,  
Dichadennet gant Doue, a deuas d'ho zikour...  
Impalaër an Autrich o velet eur seart tro,  
A dec'hâs deus an emgan eb laret ken a vo....

Gloar, honor ha meuleudi da Batronez hor bro,  
P'hini e deus biniguet emgan *Solferino* :  
Ra vezo bepret karet, ha meulet er bed oll ;  
Mam dener hor soudardet, Guerc'hez zakr Remengol!!!

Pebez burzud eo heman !... an daou impalaër,  
Goude ar brassa brezel a zo mignonet ker...  
Ar goad ne redo muioc'h, ar peoc'h a zo sinet,  
O Gwerc'hez sakr Remengol, ra viot c'hoaz meulet !!!

Sehit, sehit ho taelou, mamou karantezuz,  
Soudardet vad Breiz-Izel, ho mibien galloudus,  
Goude beza gonezet en emgannou, bep tro,  
Gant honor ha levez, ez int erru d'ho bro !

P'ho bezo bed an eur-vad da boket d'ezho c'hoas,  
It da ilis Remengol gant-ho d'ar pardoun bras ;  
Crit feir gwêch an dro d'he-zi, en eur bedi gant feiz,  
Ha pokit ive, gant joa, da ralegou sant Breiz...

E tenez ar belerinet diredet a bep tu,  
 Hor soudardet kalonek gant ho hrageier ru :  
 E korf ho rochet gwadek, diarc'hen, diskekel,  
 A vo er prosession gant BANIEL AR BREZEL !

Eur baniel ken enorabl, gant boulejou toullet,  
 A vezo gant an holl dud baniel ar peoc'h hanvet,  
 Gloar da Zoue en envou, ha peoc'h d'ar bed hol.  
 Gloar, meuleudi da viken da Verc'hez Remengol !!!

Tud leal a Vreiz-Izel, tud kalounek va bro,  
 C'hui evit pere kalir ar vuc zo c'huero,  
 Joa deoc'h var an douar ha graç digant Doue  
 Da vizita Remengol, ar sourzen a vuc.

Pedit en ho klevejo, pedit en ho glac'har,  
 Ha pedit en holl boanio hon eus var an douar.  
**BRASSA SANTEZ ZO ER BED, GUERC'HES SAKR REMENGOL ;**  
 Mar bezit devot dezi, biken na deot da goll.

Tadou kez, mammou tenr, c'hui oll preia zo  
 Ankeniet gant ho mibien ed pell demeure ar vro,  
 Deuit da ilis Remengol, ILIS AN OLL REMED.  
 Hag a vo ho pugale er gar deoc'h c'hoas rentet.

**Peden d'an Itron Varia Remengol.**

Gwerc'hez zakr Remengol, Patronez Breiz-Izel,  
 Pedit 'vit ar zoudardet zo en tâu ar brezel,  
 Pedit evit Breiz-Izel, evit ar Vretonet  
 O deuz ho karet, ho kar hag ho karo bepret.

Kenriget gant Barz Itron Varia Remengol,  
 d'he vignon ker Kloarek Koat-an-Noz.


E Remengol, an naontek a viz even 1859, da zul an drin-  
 det, devez pardon Bras ann ITRON VARIA REMED-OLL.

(Propriété.)

LESCOUR.



*Lanhuon, e ti intañvez Ar Goffic, mouler levrer.*



## INTAON AL LOCHEN

Var ton : *Sant Kaourintin, Sant Guénolé.*

Er bed ma, nak aour nak arc'hant  
N'ho deus biskoaz staguët ma c'halon ;  
N'hon nemet eur c'hez paisant.  
Kontant e oan em c'hondilion,  
Mes va fried karantesuz  
A gollan herio, pebes anken !...  
Guelit a n'hon ket maleurcz ;  
C'huec'h c'nrouadur a m'euz em lochen. — *bis.*

'N'amzer ma oa beo va fried,  
He furnez a charme va c'halon  
Va bugale, eus va c'haret,  
A roe dia konsolation ;  
Beb oll e pôken de-z-he ;  
Eun tad evurssoc'h na vo biken.  
Dre ho geston tener, bemde,  
E oan euruz ebarz em lochen. — *bis.*

Da vintin, pa c'han d'ar parkou  
Adare da gomans va devez,  
E lezan va bugaligou  
Euz va zi da gomeret evez ;  
Ha da noz pa zeuan en dro,  
Evit va distrei deuz va anken,  
En em stardont holl var va zro,  
D'am c'honzoli ebarz em lochen. — *bis.*

Braz oa va laouenediguez  
Pa vijen er guer gant va ziad,  
Bremen pa velan va merc'h kez  
An dour a deu var ma daoulagat,  
Seblantout a ra din bepret,  
Guelet he mam dener em c'hichen !!!  
En despet d'am c'heuz diremet,  
Hon c'hoaz euruz ebarz em lochen. — *bis.*

Ha ! ma c'halfen eb kaout mizer,  
Sevel a diski va bugate !  
Me c'hafe c'hoaz, gant an amzer,  
Fortunia va merc'hik, marteze !...  
Neuze va sotret a vo braz,  
Capabl da labourat eun dachen,  
Em c'hosni me a c'hallo c'hoaz  
Beva euruz ebarz em lochen. — *bis.*

Eurusoc'h c'hoaz me n'em gavo  
P'ho guelin o c'honit ho bara,  
Neuze pa zeuio ar maro  
Eus ar vuez ma d'am delivra,  
Va mignonet am enterro  
Gant va fried, pe en he c'hichen !!!  
Ha va bugate a ranno  
Va zam tieguez ha va lochen !!! — *bis.*

Em gouele donar pa vezin  
O repoz e beret Remengol,  
Plijit kemer truez ouzin,  
O Itron-Varia Remed-Oll !  
Ha pa deui va bugaligou  
Var ma bez da ober ho feden,  
C'hui, ma Doue, a bardonno  
Da ene paour intaon al lochen. — *bis.*

